



Guers Spirituel

Var an niver bian eus ar re salvet.

Vient

CANOMP UR VERS SO COMPOSET
GVAR AN NEBEUT A DUD SALVET,
 Ma teui ar sonch a guementse
 D'hon derc'hel e doujanç Doue.

A dra sur n'en deus den er bed
 Na vez o salvet pe daonet ;
 An Ifern pe ar Barados
 A so er fin ouz o gortos.

Un eternite eus a c'hloar,
 Pe un eternite a c'hlac'har
 Hon deport goude ur vuez quer ber :
 Greomp ervad endre hon eus amzer.

Estonet oun gant ar c'homzou
 Eveus a JESUS, hon Autrou ;
 Rac, ervez ma en deus discleriet,
 Ne vez o sur nemeur salvet.

Cetu penaus en Aviel
 E comz ar Furnes Eternel :
 Calz a so, emezan galvet,
 Hoguen nebeut a so choaset.

Lavaret a ra deomp ives
 Enni eo bian dor ar vuez ,



Hac henq an hent a gundu d'y ,
En er c'hef nebeut a hini.

Ret eo tec'hel diouz ar viçou ,
Ret eo praktiqa ar vertuziou ,
Miret oll Gourc'hemennou Doue ,
Ha re an Ilis santel ive.

Ret eo exerci gant carantez
An œuvrou eus a drugarez ,
Douguen ar Groas gant JESUS ,
Imita e vuez poanius.

Houman ê doctrin hon Salver :
Celaou petra a lavar , pec'her ;
Ouzit e comz er fêçon-màn
Maleur da nep na sent outân.

Nep na zoug qet e Groas guene ,
Ha na zeu qet var va lerc'h-me ,
N'en dê qet dign eus ac'hanon ,
Mont a ra e perdition.

Derc'hel mad da Zoue so ret ,
Hac e clévet , hac e yec'het ,
Ha receo an adversite
Qer coulz hac ar brosperite.

Eus a gorf hac eus a speret
E rencomp beza pur bepret ,
Mar hon eus c'hoant da velet Doue
Faç-ous-faç da vijen en eê.

Ret e vemp douç , humbl a galon ,
Ha prest ato da rei pardon

D'ar re o deus hon offancet ,
Mar fel deomp beza pardonet.

Christenien , respontit brémân ,
Pet so hac a vev er guis-màn ?
Ha n'ellomp-ni qet ayoui
Ez eo facile o niveri .

Comparêsonou so er Scritur
Hac à so terrubl a dra sur ;
Sclér e veleur dre guementse
An nebeut en em savete .

An nombr bian ar re salvet
So gant Isaï comparachet
Ous ad nombr bian a bennou
A chom goude an drám er parcou .

Hac ouz peder pe pemp froezen ,
A chom stard e blench ar vezen
Goude ma e bet ar frouez biget ,
Pe goude ma int bet cutuillet .

Mes petra eo ar pennou se a lezer ,
E scoas ma zeo ar re a zramer ?
Petra eo ar frouez-se er vezen chomet
E qenver ar re so couezet ?

Ne de qet fablou an dra-màn ,
Comzou Doue a lavarân ;
Ar Sent o deus-y prezeguet
Gant eston d'o auditoret

Pa edo Sant Bernard o vervel ,
E varvas un Hermit santel ,

D'ar memes heur trègont mil den
Eus ar vuez-màn a zeuas da dremen.

Ne oue digoret an Eêvou ,
Neuze nemet evito o daou ,
D'ar Purgator e oue casset
Tri da veza purisiet.

Ar rest eus an trègont mil den
En Ifern a rancas disqen ,
Evit dont eternelamant ,
Da souffr eno pep seurt tourmant.

En ur sarmon da Bertoldus ,
E arruaś un dra estonus ,
Subitamant e tecedas
Ur bec'heres dre glac'har bras.

Bertoldus hac an assamble
En em laqas da bedi Doue ,
Ha cetu-hi ressuscitet ,
Ma còvessaje e fec'het.

Mes estlamet ouent dreist pep-tra ,
Dezo pa lavaras houma ,
Ez oa iveau ganti maro
Tri uguent mil den pe var an dro.

Hac eus an tri uguent mil-se
A gomparissas dirac Doue ,
D'ar barados ne deus hini ,
D'ar Purgator voa cacet tri.

Mes strinjet voe oll ar re-all
Da lesqui en tan infernal ;

Siouas calz a vezo collet,
Ha neubeut a vezo salvet.

Simon Stilit a lavare,
Hac an Abat Nil e c'houde,
Penaus ez e salvet a boan
Eus a zec mil ene unan.

Ha mar be salvet a boan gre,
An den just ha choaset gant Doue,
Ma ide, den impi ha pec'her,
Da guzet a faç da Varner?

Ar Sent, pa edont er bed-mâ
N'o deus paouezet o crena:
Ha gant aon na visent collet,
Pinigen vrás o deveus grêt.

Pec'her ingrat ha didalve,
Piou a ro assuranc dide?
Penaus ec'h elles-te beva
Qer joaüs ha ma zout bremâ?

Sin eo ez out abandonet,
Hac e fell dit beza daonet,
Ma na de touchet da ene
Gant qen lies a virione.

Me a seblant din e clevàn,
E galon o comz er guis-màn:
Ne doun qet crouet gant Doue
Da veza daounet goude-se.

JESUS-CHRIST, leun a vadelez,
En devezo ouzin truez,

Ne souffro qet e ven collet ,
Pa zoun qen quer dezàn coustet.

Tromplet out , pec'her misérabl ,
Da gomzou a so detestabl ;
Desesperi nicun na dle
Na qen nebeut presumi re.

Maro evit guir eo hor Salver ,
Evit adprena ar pec'her ;
Mes biqen salvet ne vezi ,
Ma na gueres contribui.

Rac-se'ta sench da goal vuez
Pe renonç da silvidiguez ,
D'ar Barados renonç a grenn ,
Peautramant gra pinigen.

Evit guir , JESUS a bromet
E roi recompanç bras meurbet
D'ar re a imit e vuez ,
Hac a vev en e garantez.

Mes , allas ! piou eo ar re-se
A guers qen eon dirac Doue ?
Nè gredàn qet e vez er bed-màn
Eveus a zec mil den unan.

Tout gant ar bed en em dallomp ,
Hor c'hein da Zoue a zistroomp ;
Ne zeus qet unan a guerse
Dirazàn evel ma tlesse.

Piou bennac e Doue na sonch qet ,
Endra en deus bues ha yec'het ,

Er c'hlénvet hac en dremenvàn,
Ne sonch qet ennan e-unan.

Bue an darn vuia ar Gristenien
so siouas qen disordren,
Ma veler aparanç ebet
E ve calz anezo salvet.

Ne glêvet nemet goal gomzou,
Leoudouet, goal bedennou,
Drouc prezec ha bavardiez,
Ne zeus nemet fallagries.

A boan e caffet den bremàn
Ma c'hallet franc fiziout ennan,
Ar vertus vrás a garantes
A so dibaut en hon toues.

Nebeut so a zevotion,
Nebeut so a Religion,
Casi hep feiz hac hep Lesen
E vev calz eus a Gristenien.

Heuill fell dezo o liberte,
Pa ouffent beza daonet goude;
Rac-se ne doun qet estonet
Mar bez an darn-vuia collet.

Pa sonjân en Eternite,
Em eus truez ouz va ene :
Livirit din ar guir secret
Evit beza un deis salvet.

Ne vezò qet me a gomzo,
Hon Salver e-unan a vezò :

Rac-se selaouomp e Setanç
Attantif ha gant reveranç.

Ouzit pec'her , eo e comzàn ,
Da calon en em adressàn :
Sench a vuez , gra pinigen ,
Pe ne vezi salvet biqen.

Ar maro peurvuia a vez
Hénvel meurbed ouz ar vuez ,
Cundu eta ur vuez santel ,
Mar fell did e stat vad mervel.

Ennes eo sur ar guir secret
Evit beza un deiz salvet ,
Ha beza en nombr an eneou
A antreo ebars en eêvou.

Var an douar ne zeus hini
Na ell dont d'en em gonsoli ,
E vezo gant Doue pardonet ,
Ma car caout guir gueuz d'e bec'het.

Courach deoc'h eta , pec'herien ,
Commancit da ober pinigen :
Nep e grai a so assuret
Da veza er Gloar curunet.

F I N.